

D'ar Roue,
Evit e vouel, ar c'henta mae 1843.

(432, suite)

Eur vech benac emeus credet, ò va Roue!
Adressi va rimou d'ar Pring zo gant Doue:
Evit e zemezi, ha badiant e vab;
Atao e voe contant, a ze ezon gouial,
Rac receo a ris prest, gant calz a levenez,
Demeus abers ar Pring, qer leun a vadelez,
Ur vedailen en bronz, hac un all en arc'hant,
Evit preuven e voa eus va rimou contant.

E mis here goude, e prizas scrifa din,
Da zisquez adare e voa contant ouzin,
Abalamour d'ar pezh am boa bet publiet
Dre m'oe an Duc d'Anjou gant Doue preservet
Demeus maliq infam ur murtier furius,
Egrecet er bed oll gant an dud vertuzus.
Allas! pell voan da sonch er pezh a errije
En drizec a vis mae da ranna hon ene!...

(433)

Goude beza canet e joa var an douar,
E ris anaout en Breiz ar sujet a c'hlac'har.

Nombr bras eus a scridou ameus bet publiet,
Ha calz divar va c'houst qerqent distribuet,
Evit discadurez an dud divar ar mēz,
Ha ze a nombrou bras, repetet alies.

Ho puez, va Roue, en brezonec laqet,
Dre oll en Breiz-Izel gant joa a voe lennet.
Histor Rouane Franç, ho presang var ho tron,
Revolution gouere, Gloeyer bras Lyon,
Ar c'holera horrupl, ar fort Sant-Yan-d'Ulloa,
Ar querc a Constantin, tost a zo da c'hoec'h vloa,
Ar vaccin, ar chaq-clan, proezion ha muzurion,
Sinon a Ventroutez, hac ar Beilladegou,
Ar Martinig, Hambourg, an hent houarn Meudon,

(434)

Distruch ar Point-a-Pitr, Buez Napoleon,
 La Tour-d'Auvergn, Cambron, Janned d'Arc, Cozanet,
 Ar sujedou - ze oll a meus bet publiet,
 Ha calz eus a re all. Va c'hoant a voa donet
 Laqat o hanavout etouez ar Vretonet.

Hiris e credan dont da offr dèc'h, va Roue,
 Va hommach a galon, gant ar c'hraç a Zoue.
 Ra blijo d'hor C'hrouer, divar a lein e dron,
 Scuill var Ho Majeste e Venediction!

Ra vo hon Rouanez, eus an oll mamou squier,
 Eurus en ho gichen epad e oll amzer!

Ra baro ar bonneur var ar famill Royal,
 Princet ha Princeset, qer mad ha qer loyal!

Ra vo ar Prinç Joinvil, ar Brinces Clemantin,
 Eurus en o famill, ha bar a c'hraç divin!

Prijit, ô va Roue! hirio da ur Breizjad
 Dont da regeti dèc'h a galon eur gouel mad,
 Ha ma vo er Franç oll peb den contant ha quiè,
 Deiz Gouel hon Roue mad, ar c'henta a vis Mè!

(435)

Ah! peguer contant ven, ma elfen lavaret:
 Va reget a galon d'am Roue zo plijet!..

A. Lédan.

(Vol. VI, p. 432-435.)